


NOUËL

Très lent.



Spe-red zakr ha di--vin, m'ho
ped reid d'in ar c'hra-s, da c'hal-louddis-kleria
eur mys-ter' zo ken bra---s; an
don-ne-di-gez kaer A Je-zus mab Doue,
zo deut he-noaz er bed e
kreiz ar baou-ran-te.

Spered zakr ha divin, m'ho ped, reit d'in ar c'hraz,
Da c'hallout diskleria eur mister 'zo ken braz :
An donedigez kaer a Jezuz mab Doue,
Deut henoaz war ar bed e-kreiz ar baourante.

E oamp pell-zo amzer o c'hortoz anezan
Da zont war an douar evit hon dasprenan :
Digoët eo an termen ma vefomp dijalet,
Ganet eo e Betlem gwir Redemptor ar bed.

An nenv hag an douar, o welet ar Bugel,
A drid a levenez, a gân : Nouël ! Nouël !
Klevet a rer en oabl soniou ar Baradoz,
Hag eur sklerder neve a splam e-kreiz an noz.

Eun èl er sklerijen raktal a ziskennaz :
« Setu neventi gaer, kaeran zo bet biskoaz !
Dihunit, emezan, ha zavit, pastoret,
Ganet eo ho Salver, it d'ar c'hraou d'hen gwelet ! »

Pa glev ar bastored gant an èl ar mister,
Penôz ema ganet o mestr hag o c'hrouer,
E lezont o denved war ar maez da beuri,
Evit mont da Vetlem er c'hraou d'hen azeuli.

Na oa ket skler an deiz pa gavjont anezan,
E-barz eur marchosi hep na goulou na tân :
Na mezer na lian n'an devoa war e dro,
Nemet gouriz e vamm, netra ken d'hen golo.

Hag i holl d'an daoulin, tro-war-dro d'ar c'have',
O laret o feden hag o kana Nouël,
Ha, kent distrei d'ar ger, e rojont da Zoue
Pephini e brezant herve o faourante.

Me ho ped, pobl ar bed, heuilhit ar Bastoret,
Azeulit ho Krouer war ar plouz astennet ;
E-tal d'ezan zonzit e tle, pa vezo braz,
Astenn e izili evidoc'h war ar groaz.

E baourante 'zo kaoz d'hon holl binvidigez,
Deut eo d'hon c'hennerza dre e zempladurez :
Hon c'halon a c'houlen evit renoz enni ;
Glac'har braz an defe ma ve kollet hini.

Kanomp Nouël da Vab Doue,
Ganet henoaz er baourante;
Da Jezuz ha d'e vamm zantel,
Kanomp mil gwech : Nouël ! Nouël !